

AN DISPUT CHOQUANT

SAVET ENTRE DIOU

PLAC'H YAOUANC.

Tosteet da chileo cannan,
 Pa meuz cavet sujet da riman,
 Ma clevfet an disput choquant,
 Savet entre diou plac'h yaouang
 Evel eur rageset tréménét,
 Ha sables bars neun néhadec.

Trégont plac'h ha voangq ho nezan,
 Hac ho clevet an disput-man,
 Ha tout ha léront hinq contant,
 Ha vo groët eur zon divertissant,
 Ha bolemour d'ar homzo vaën
 Ha neuz laret an eill d'he ben.

Bars ma bro ha voelan eur his,
 Commun ben toez eur yaouanquis,
 Nep ha ve he plac'h an nehadec,
 Ha dac'h da gast dezi eur boquet,
 Ha d'abardez hep lacat mar,
 Hei eur pot da douguen eur c'har.

Pa voe sonnet creiste-anter,
 He antreas eur plac'h gant eur baner,
 Lech ma voa eur merc'hët ho nezan,
 Vid rein eur boquet da Annan,
 Hac ive eur voutaillat vin,
 Ha daou pe tri grapat rezin.

Eur plac'h-man gomz dre discourio,
 Pe voa ho rein he fresancho.
 Mez Izabel, pe deuz goëlet
 Da biou ha roet eur boquet,
 He sav eur jalousi hen he fen,
 Me deuz bet laret evelen.

Min gret-din ee vit ober jill
 Ha roer an treo-ze d'eur peç vill,
 Pe he deuz groet dies han neze aman,
 Evit hon lacaat d'a viscan,
 Hac ober he ambarasso,
 Evel pa de camarado.

Annan pa deus bet intentet,
 En he boutail he ze eroguet,
 D'evfan d'a yehet Izabel,
 Pa voa neumpgat mad an avel.
 Evidon, he mezi, n'a nonquet couant,
 Bepret he plijeant excellant.

IZABEL.

Tout pez homp aman pa nomp c'houant
 A momp eur sort-se gant hon arc'hant,
 Quercouls ha c'hui faç piccotet,
 Daoulagat-du, groac'h didantet.
 N'onquet piou ha quemervfe frejo
 Da rein d'eur sort dac'h boquedo.

ANNAN.

Evidon na nonquet stiped,
 Ha ran ma zremen dre eur bed,
 Couls ha ma ra pompinello,
 Crampoez pardon liboudenno,
 C'houec'h miz goude ma vent dimet,
 Ha ne mez an oll ouz ho goëlet.

IZABEL.

Te viquet vill goude dimin,
 Rac na gavi den deuz eurejin,



Ha pe spije te pemp mil scoet,
Ma vijen pot ne c'houljen quet,
Mert ezom mije eur spontail :
D'ober-ze ha tapches da dail.

ANNAN.

Min meuz goëlet calz ha verc'het coant
Hac he teu ennes chanchamant,
Feneant ha vent vell eur chass,
Nemert dre forç na chanson plaç,
Ho sonjal bevan gant couantis
Muoc'h vid deuz han honestis.

IZABEL.

Petra leres, peç effrontet,
Discouarn tufod, bec morlivet ?
Min meuz groet partout ma dever,
Ha capabl d'hober c'hoaz neuz quever,
Ha bevet bars hen honestis,
Quercoulz ha c'hui, plac'h he bleo gris.

ANNAN.

Gennit man an oll cio-mad,
Ha bepret na zell den deuz cad,
Nemert eur liper chopino,
Eur foët boutiq, eur chraq otro,
So avoent ti nonpera,
Bed quemeret evid he vara.

IZABEL.

Michañç he teuz c'hoant da glevet
Comz dit deuz an diar scarbet,
He vleo an liou da carotes ;
Michañç he heo digant henes,
He teuz bet da voutaillat vuin,
Bequeden vrao, plac'h eur raisin.

ANNAN.

Bezan n'euz commodite,
Da breman pa n'ho bolonte,
Rac na lacquet he arc'hant,
Evel ma ra da galant yaoanç,
Da c'hoari chass-bout ha da roulan,
Hepeat dillat da n'eump guiscant.

IZABEL.

Da hinin zo eur pot faro,
Pa ve gantan hi goz vrago,
Digouet dezan deuz he dad coz,
Ouz pen eur voalen zo ne fonç,
Ha voar he benn eun toq pomper,
Evel Jilo vont da foar Treguer.

ANNAN.

N'imp zo arri daou den noajet,
Heuillomquet eur hiz vell ma ret.
C'hui zur euz eur mancho pagot,
Ho mouchouer betec ho poto,

Ha bordet diadraou ho roben,
Hac ho hinvis michañç hep losten.

IZABEL.

Min n'a c'hoari man d'an havis,
Plac'h he gouelle denno tapis,
Jilo gant he porpant lost moen,
Ha c'hui gant ho pasquen dosquan,
Hac ho tavanger berlig foulet,
Ha zo daou bichon brao da voëlet.

ANNAN.

Brao ha voalc'h ha vemp da voëlet
Hen qualite na domestiquet,
Quen brao ha c'hui gant ho manego,
Ha gant voulouz voar ho mancho,
Hac ho chossonno brodet
Hac ho dut baoude clasq ho boet.

ISABEL.

Penoz Annan, mez Izabel,
Noc'hquet arri prest da devel ?
Rac min zo squiz pel ha zo
Ha vezan pouillet gant louzenno ;
Min na vent quet pell, a c'houi clev,
Evit tapout croq an ho plev.

Perhen an dervez pe deuz goëlet
Pennoz ha voangt quen maliçet,
He deuz comzet quen familier,
Evit terrin he benn d'an affer,
Deuz an eill coste hac eguile,
Evit lacat silanç an antreze.

Pa devoa debret ho couangnio,
He heo bet arriet Jilo
Da douguen he har da Annan,
Pe n'ha fleurisset ha nezan.
N'evoa nemerti a voquedo,
Hac he voa stad barz hen Jilo.

M'a tremenfe Jilo dreaman,
Ho vont d'eur guer gant char Annan,
Quement den zo an assamble,
Ha pa n'a vequet yac'h ha houaresfe,
Ho voëlet ho Jilo ober garr,
Hen quever Annan ho touguen he harr.

Ha gantan he vrago fonç braz,
Comzet meuzom ha nezan c'hoaz,
He porpant lost moen hac he doq pomper.
Mez lezomp-an da vont d'ar guer ;
Pa nevo c'hoant, gant arc'hant
He chancho he harbillamant.

Pierre RAISON.

(Propriété de l'Editeur.)

Lannion, Veuve Le Goffic, éditeur.